Fish and fishing. trosg (a cod), langa (ling), agait (skate), geadag (a large trout or young salmon), cnòdan (gurnet), carabhannach (a red sea-fish, marine perch?), ucas or uca (a large coal-fish), saoidhean (young coal-fish), tàbh (a hand-net or landing net), dorgha (a hand-line for fishing).

Sea birds. sgarbh (cormorant), sùlairc (solan-goose).
Ships and sailing. bàta (a boat), bàrlinn (a galley), sgoth (a skiff), seòl (sail), stiùir (rudder), ailm (helm), agòd (sheet of sail), rangán or reangan (timber ribs of boat), tobhta (thwart or seat in boat), rac or racan (a ring running freely on a mast to which the yard is attached), stagh (a stay), sùdh (seam of a plank), stoc (gunwale of boat), acair (anchor), lunnan (launching rollers), sgioba (crew).

House and furnishings. tobhta (roofless walls or site of ruined house), gàrradh (stone wall or fence), clobha (pair of tongs), lobhta (loft or attic), uinneag (window), cnèbilt or creapailt (a garter, "knee-belt").

Agriculture. lot (a croft or small piece of land), tàl (adze), locair (a plane), sgeilm (a chisel), risteal (a plough), molltair (miller's share of grain), staoig (a chop, piece of meat), toirsgeir (a peat-cutter), rìghan (a pile of two or three peats set on end to dry), bac (bank) (as in bac-mòna, peat-bank), sìoman (a rope, especially of heather), gearraidh

(a small piece of land surrounding a house or shieling). In Sutherland three words derived from Norse are "husgus!" (used by dairy-maid when calling a cow), "tundhi" (used when calling a bull), "tìrr hi" (used for driving away cattle).

Miscellaneous. iarla (an earl), tràill (a slave: this replaced the older Celtic "mcg"), rabuidh (a neighbour), mòd (a court of justice), sgillinn (a penny, originally a shilling), àmunn (a warrior, originally a steward or tax-gatherer or royal official), lagh (law), bòcan (hobgoblin), uruisg (monster), sgudal (rubbish), fuigh! (exclamation caused by unpleasant smell), ramsachadh (searching, ransacking), crùb (to crouch), bìdeadh (biting), tapadh leibh (thank you), cha tug e taing air (it did not affect him at all).

The late Mr Kenneth Mackenzie of Barvas, Lewis, over fifty years ago noted the following as of Norse origin. The word "buanna", which he defines as "an idle person who lives on the best that his neighbour can afford" and which the Rev. Dr. M. MacIenman (in his Dictionary) defines as "a billeted soldier, a mercenary developed into a parasite, an idler", Mackenzie derives from the Norse bandi a farmer, but Oftedal rejects this. Mackenzie also cites what he calls the only Norse numeral in Lewis -- trithir, meaning three persons collectively (like modern Gaelic trìthir) from Norse thrír. He says it is obsolete but is preserved in Ness in a verse ascribed to Donald Morrison, son of the famous Brève:

"Dh'iomarainn fear mar fhear ri dithis,
 'S nam b'fheadar e, mar fhear ri trithir."
 (I would row the boat against two,
 and, if need be, against three).

Quite a number of vituperative or abusive words are derived from Norse, especially in the Gaelic of Sutherland. E.G., a thìlotar (you knave!), slabhcar (a spiritless fellow), dais (a blockhead -- in Rob Donn's poems), colbhar (a greedy fellow -- also in Rob Donn), glutar (a glutton), amhlair (a dunce). In my native district I have heard "a thrìll!" (you slave!) used in scolding. Does not all this suggest reminiscences of the rough manners of the Vikings in their dealings with their Gaelic inferiors? Driepail (busy) and gleadhraich (din, from Norse gladir, merry-making at a festival) carry over the centuries the suggestion of hard work and noisy ploys!

In addition to the Norse influence on Gaelic vocabulary, Oftedal says that "It is a well-established fact that the sound-systems of many Scottish Gaelic dialects bear traces of a very strong and thorough-going interference from Norse." In particular, he says, "Lewis intonation bears a striking resemblance to the tonal pattern of my own south-west Norwegian." The Lewis pronunciation of slender "r" as "th" may be a Norse feature. So also, some scholars maintain, is the pronunciation of initial "sr" as "str" in northern

Gaelic, e.g. sruth (a stream), sròn (a nose), srath (a glen), sreang (a string), sreath (a row), srian (a bridle), pronounced respectively as sruth, stròn, strath, sreang, sreath, srian. Professor Kenneth Jackson remarks that among the features in Scottish Gaelic which, not being in Irish Gaelic, may be due to Norse influence is what is called "pre-aspiration" of p, c, t -- that is, inserting an h-sound before these letters in, e.g., ceap (ceahp), cat (caht), mac (mahc). Dr Jackson has also shown how "Common Gaelic", the common ancestor of all three (Irish, Gaelic, and Manx), divided first into Eastern Gaelic (Manx and Scottish Gaelic) and Western Gaelic (Irish Gaelic), Manx and Scottish Gaelic remaining more akin to each other than either is to Irish Gaelic. Eastern Gaelic became less complicated and more simplified than Western Gaelic, and Dr Jackson says it is tempting to regard this as due to Norse influence, but he also points out that this simplification occurred later than the Norse period and it also occurred in dialects of Gaelic outwith the areas of Norse influence.

NORSE PLACE-NAMES

The most obvious indication of the Norse occupation of certain areas of Scotland is to be found in the place-names. It has already been remarked that the proportion of Norse place-names ranges from almost 100 per cent. in the Northern Isles to 11 per cent. in Arran.

It would seem that the Norse usually accepted the existing names of the larger islands, while giving them a Norse spelling. Shetland -- long really a part of Norway -- lost its old Celtic name of "Innis-Cha" ("island(s) of the Cat-folk") and was renamed Hjaltaland (in Gaelic, Sealtainn). Orkney retained its pre-Norse name of "Innis-Orc" (island(s) of the Boar-folk"), Orkney and Shetland together were called in Norse "Nordreyar" (The Northern Isles).

The Hebrides (recte "Hebudes") were called the "Sudreyar" (Southern Isles), whence comes the title of the Bishop of Sodor and Man (that is, the Southern Isles or Hebrides and Man). Centuries later people forgot what "Sodor" originally meant, and in a Description of Iona in 1693 we find it stated that "A considerable city was in the Isle (of Iona) of old called Sodora, the vestiges whereof are yet visible by the port and streets thereof. It lay in the midst of the Isle upon the east coast."

Skye, Mull, and Islay bear today the same names they bore centuries before the Norse arrived upon our coasts.

The smaller islands the Norsemen mostly re-named. The ending "a", "ay", or "ey" represents the Norse word for an island, while the first part of each island-name may be the name of a person, or a bird or animal, or a descriptive term. To several islands the Norse gave the name "Orfirisey" ("ebb-tide-island", that is, a tidal island). The name has developed into

Rev. T.M. Murchison

the Gaelic "Oro'osaigh" (note the hiatus), in English "Oronsay" and "Orosay". There are nine or ten Oronsays along our Scottish coasts.

A small island adjacent to a larger one the Norse likened to a calf alongside its mother-cow and called "Calf-island", and so we have a small island, "Calbh", in Tobermory Bay, Mull, and the Calf of Man.

To quite a number of islands the Norse gave the name "Fabbay", meaning "hermit's island." These hermits were ecclesiastics or monks of the Celtic Church who chose to live a solitary life, usually on small islands, and we may take it that each island to which the Norse gave this name had a hermit on it when they first made contact with it. Akin to this word is the word "Papyl" in its various forms, meaning a monastic establishment. There are in the Orkneys and Shetlands five Pabbays and four Papyls, and in the Hebrides six Pabbays and two Papyls.

Many islands bear the names of persons -- perhaps in each case the name of the first Norse Owner of the island. E.G. Eriskay (Eric's isle), Bemera (Bjorn's isle -- there are several of these), Groa (Groa's isle -- Groa was a woman). Some islands have the name of an animal, e.g. Jura is "Dihraidh", "deer-island." Some have bird-names, e.g. Scarba (cormorant-island). Other names of interest are Lingay (heather-island) and Flotta (flat-island).

This can be a fascinating subject, but we must not spend too much time over these Norse place-names. The word "eilean" (island) is from Norse ("ey-land") and has displaced the older Celtic word, "innis", which in modern Gaelic is used for a meadow rather than an island.

Some Norse elements in place-names worth noting are these: vick (a bay or inlet: Wick, Uig), vagr (a bay or creek: -wall, -voe, bàgh), nes (a promontory: Caithness, Durness, Duirinish), gja (a ravine or cleft in coastline), eigh (an isthmus: Aith, Eye in Lewis), klettr (a rock or cliff or rocky bank: Cleat), bakki (a bank), dalr (a valley), fjall (a mountain: fell, -val), fjordr (an inlet of the sea: Firth, -ort, Snizort, Seaforth, Amisort), a (a river: Grimersta, Laxay), bolstaðr (a farmstead: -bost, Habost, Carbost), setr (a house, home-stead) and saetr (a shieling or out-pasture) (now indistinguishable but found in Shader, Linshader, and similar names), stadr (a settlement or abode: Crablista, "Croule" abode", Mangarsta, "Mangar's abode"), borg (a fort), byr or by (a farm: Borpie, hamarr (a rock-wall: Hamar in Skye), kvi (an enclosure for cattle), gadhr (an enclosure), skaldi (a hut, shed, or great hall: Skail, Scalloway).

In Lewis the word "gro", from Norse "grof" (a pit or ravine) is found in no less than 63 stream-names, e.g. Disgro (at Boive), Botagro (at Shader).

A miling-place (in Gaelic "buaille") was in Norse "stodhull". So in Barra we have Tangasdale, which stands for "Tangastodhull", meaning the

Rev. T.M. Murchison

milking-place near a headland.

Enough has been said, however, to show that the impact of the Vikings on the Celts of Scotland has been varied and enduring. They have helped to make us what we are, for good and for ill, as individuals and as a people.

Rev. T.M. Murchison

LEVEZON AR VIKINGED WAR GELTED BRO-SKOS

gant ar Rev. T.M. MURCHISON

En 8t kantved goude H.S. eo e krogas Norziz da gaout levezon war ar vro a zlee dont da vezañ Bro-Skos; e-pad pemp kant vloaz pe dost e padas al levezon-se, betek Emglev Perth e 1266, pa voe sinet, goude trac'hidigezh Norziz en emgann Largs e 1263, ez afe an inizi Hebridez gant kurunenn Bro-Skos. E-pad daou c'hant vloaz all e chomas c'hoazh an Orkneys hag ar Shetlands dindan bez' henniezh Bro-Norge, a-raok ma taufent, en eil hanterenn ar XVvet kantved, dindan galloud ar Gurunenn Skosat. Arabat e vefe krediñ, avat, e paouzas al levezon norzat er c'hornioù-bro-se d'un deiz merket-mat, bezet 1266 pe 1468.

Daoust ma tle ar brezegenn-mañ bezañ diwar-benn an dibennoù eus aloub-erezh Norziz, bez' e c'heller marteze ober meneg, buan ha buan, eus an abegoù e zo bet da argadenn ar Vikinged en hon enep, hag eus an istor anezhi.

Ar Vikinged a oa anezho henwerzhourien ha brezalourien war-voe a guitas, en o "bagoù hir", fiordoù Skandinavia avit mont d'ober beajoù risklus a-hed aodoù Europa ar C'hornog hag an Inizi Breizhveurek.

Da gentañ en em ziskouezjont a vagadoù distag, o tagañ trumm an aodoù estren, met diwezhatoc'h e krogjont da ziazazañ e lod eus an douaroù a weladennent.

War-dro dibenn an 8t kantved eo e voe graet anaoudegezh da gentañ gant ar Vikinged laeron-voe. E 793 setu anezho da dagañ manati Lindisfarne, o tistrujañ an iliz, o lazhañ hag o veuziñ ar venec'h hag al leanezed. Ar bloaz war-lerc'h e tagont nouspet enezenn war aodoù Breizh-Veur. E 795 e lakaont en arigrap Rechru, e-kichen Dulenn, aodoù Kembre, Iona hag enezenn Skye. E 806 e vez taget Iona adarre - bet dija argadet meur a wech, - ha lazhet 48 manac'h. En em dennañ a reas an Tad-Abad eus Iona ha mont da vevañ e Kells en Iwerzhon, hag eus Iona ez eas pennarter an lliz Keltiek e Bro-Skos da glask repu e Dunkeld.

Prouet eo bet e oa deut Skandinaviz da Vreizh-Veur evel kenwerzhourien a-raok dont evel tegerien. War a hañval ivez, meur a wezh ne dagent ar c'hèriad-ennoù war ribl ar mor nemet evit kaout boued. O tilestrañ en ul lec'h bennak, bez' e veze ar boaz ganto da strollañ an holl loened-korn, da lazhañ anezho war an aod, da leuniañ o charnelloù gant ar c'hig fresk - ha gwazh a se evit an neb eus ar vro a glaskje stourm outo. An doare-ober-se a oa anvet "strand-hogg", ha ne oa ket ur boaz gwallscuezhus en amzer-se pa oa kement-mañ da reolenn-acur, evel ma lavar Wordsworth diwar-benn Rob Roy : "an neb en deus

Rev. T.M. Murchison

nerzh, ra gemero; an neb a c'hell, ra viro !"

Buan e voe dizoloet gant ar Vikinged e oa un doare da ober yalc'h kalz aesoc'h, primoc'h ha suroc'h - zoken ma oa dañjerusoc'h - eget labourat an douar pe pesketa pe zoken ober kenwerzh : hag e oa laerezh traoù ar re all. Kavet e voe buan ganto, ivez, e veze pinvidigezhioù bras - listri aour hag arc'hant, bravigoù, kinkladurioù, dilhad kaer - da laerezh er manatioù a-hed an eod.

Kent pell e krogas ar Vikinged d'en em ziazezañ war an aodoù, da neb-eutañ evit ur pennadig-amzer hepken, evit ma vefe aesoc'h dezho ober tagad-ennoù-skrapañ tro-dro; ha goude-se, en em ziazezañ da vat an enezennoù, pe war ar begoù-douar; ha goude-se c'hoazh en em lakaat da sevel gant ar steroù ha mont da ziazezañ en argoad.

PERAK E TIVROAS AR VIKINGED ?

Ha perak 'ta, dres d'ar mare-se, an 8t kantved, eo deut ar Vikinged d'en em deurel er-maez eus Skandinavia ha da blavañ war pobloù all Europa ar C'hornog koulz ha d'en em lodañ e Rusia, war-du ar reter ?

Daou abeg zo da gement-se. Da gentañ, ur vro nozh ha yen e oa Skandinavia, ur vro diaes bevañ enni, ha diouti e save gwazed ha merc'hed kalet, leun a fiziñs ha leun a intrudu. Ar boblañs o kreskiñ pa oa bihan ar pinvidigezhioù-natur, e oa ret mat e vije divroadez, e vije klasket douaroù nevez, lec'hioù nevez da sevel ti, andonioù nevez a vuhez.

D'an eil e oa deut Norziz, anezho pesketourien kenkoulz ha labourerien-douar, da vezañ severien-vagoù eus an akuitañ-holl. Dreist-holl pa veze fardet ganto, evit o bagoù, keinoù dispar, a vije bet, hepto, risklus-bras mont d'ober beajoù hir war vorioù dirollet. Ha berrek-tre e oant war ar bageal.

Gant-se, rediet ma oant gant gwask-diabarzh o bro, skoazellet gant doareoù an natur hag an arboellerezh, ha barrek ma oant da ober ha da gas war-raok bagoù gread diouz ar morioù bras, ez eas Norziz etrezek an donvor. "Ijinañ a rejont un doare bag, un doare bageal hag un doare spered hag a voe dezho an nerzh da dalañ ouz ar mor : bez' ez int bet ar c'halonkekañ bleizimor a zo bet gwelot biskoazh ar bed."

D'ar mare-se, ivez, a c'helle stad an traoù en Europa ar C'hornog lakaat Norziz da soñjal e oa deut evito ar mare mat. Ez-politikel e oa disrannet ha gwan, an holl vroioù e Kornog Europa. Savet en doa Charlez Veur un impalaerezh vras - hag a oa en em vrzuznet e rouantelezhioù enebour diouzhtu goude e varv, ken o c'hellas Norziz taurer o zroad e Bro-C'hall : dont a rejont da vezañ gallegerien da sevel eno ur c'horn-bro anvet Normandia ha, troet da Normanen, ez aloubjont Bro-Saoz ha Bro-Skos, o tegas ganto ar c'hladalc'halezh.

E Bro-Saoz e oa seizh rouantelezh vihan, alies o vrezelianañ an eil a-enep eben, an eil pe eben o ren, tro-ha-tro, gant rouanez ha gant harzoù o kemmañ dibaouez. En Iwerzhon e oa meur a veuriad ha meur a roue bihan, gant emgannoù diastal, rak ne oa ar gelloud gant ar Roue-Meur nemet dre anv.

E Bro-Skos ivez n'he doa ket tizhet c'hoazh ar stabilder hag an under

politikel. En 8t kantved e oa anni peder rouantelezh.

Eus ar Firth of Forth betek an hanternoz e oa rouantelezh ar Biktad, anni ar Shetlands, an Orkneys, Gwalarn ar c'hevandir, hag Hebridez an Hanternoz. Piv oa ar Biktad, eus peloc'h e teuent, passet yezh a gomzent, - setu aze ur gudenn eus an diaesañ. Evel ma lavaras an Dr F.T. Wainwright, ne doa ar gudenn-se nemet "ur vered a c'houlakadurioù diskaret". Ha bez e c'hellomp lavarout, ouzhpenn, e talc'h lod eus ar goulakadurioù diskaret da sevel o fenn adarre !

E gevred Bro-Skos, eus ar Firth of Clyde betek Bro-Saoz an hanternoz, e oa rouantelezh Brezhoned Strathclyde. A-raok ar mare-se e oant bet mistri war greistaiz a-bazh Bro-Skos, met deut e oa o lodenn-vro da vezañ strishoc'h.

Er pezh a zo hiziv an deiz Argyll hag an enezennoù stag outañ, e oa neuze rouantelezh Dalriada, savet gant Skosiz, pe Gouezeled, Iwerzhon, hag o doa kaset ar Biktad er-maez eus ar c'horn-bro-se.

Er mervent, eus ar Firth of Forth betek Bro-Saoz an hanternoz, e oa rouantelezh Norzhumbria, savet gant an Angled, hag int deut eus ar c'hreistaiz, oc'h argas ar Vrezhoned war-du ar c'hornog.

Er Skos disrannet-se, e-lec'h ma veze alies ar peder rouantelezh o stourm an eil a-enep eben, e teuas ar Vikinged. Soñjal a ra d'an It. N.K. Chadwick e c'hell bezañ bet un dra all c'hoazh o vroudañ ar Vikinged da ziskenn war an aodoù atlantel-se : strollad-bagoù ar Frized, a oa an tu-kreñv gantañ e Mor an Hanternoz, a oa bet damzistrujet gant Charlez Vartel e 774 hag, eus an tu all, e oa strollad-bagoù ar Biktad, hag a wareze an Orkneys hag ar Shetlands, war an diskar ivez. Hentoù ar mor a oa, a-se, digor d'ar Vikinged.

PELEC'H E TIAZEJONT

Ar pastelloù-bro a ziazezas ar Vikinged enno a voe, e Bro-Skos : 1.- Inizi an Hanternoz (Shetland hag Orkney) hag a voe, evel just, ar re gentañ tizhet ganto pe gitañjont o bro da vont war-du ar gevred; 2.- Inizi ar C'hornog, pe Hebridez, gant ur wrimenn strizh a-hed an aod kornogel eus Beg-Douar ar Gounnar betek Kintyre; 3.- Caithness ha Sutherland; 4.- Galloway, ar c'horn eus Bro-Skos ar muiañ er gevred.

Bez e voe, a dra sur, lazhadeg ha reuzeudigezh, met n'eus prouenn ebet e vije bet kaset da get ar boblañs er c'hornioù-bro ma touaras ar Vikinged. Sur-mat e teujont da vezañ mistri ha renerien, met ezhomm o doa eus tud ar vro evel sklaved pe servad da labourat an douar ha da roañvañ er bigi, hag ezhomm o doa eus merc'hed ar vro evel gwraez. Zoken al lec'hioù poblet ar stankañ gant Norziz, da lavarout eo ar re zo ar stankañ enno hiziv an deiz an anvioù-lec'h a orin norzek, n'eo ket sur tamm ebet a vefe bet lazhadeg pe argaset da vat ar boblañs. Marteze ne oa ket eno tud o chom, pe e oa nebaet a dud o chom.

Meur a anv a oa roet d'ar Vikinged gant ar Galled. Anvet e vezent Na Lochlannaich, Lochlann o vezañ an anv roet da Skandinavia, an orin anezhañ o vezañ dianav. Anvet e vezent ivez Goill da lavarout eo estrenien. E gouezeleg

e vez anvet c'hoazh an Hebridez-Pellañ Innse-Gall, da lavarout eo Inizi an Estrenien, hag a-hed hon aodoù e c'heller kavout anvioù evel Rubha nan Gall (beg-douar an estrenien), Camus nan Gall (Pleg-Mor an estrenien), hag Fileann nan Gall (Enez an estrenien).

Quzhpenn-se e ouie ar Guezeled ober an diforc'h etre daou seurt Gaill. Bez e oa ar Fiann-ghoill, estrenien wann, hag a oa, war a greder, Norziz, hag an Qubh-ghoill, estrenien zu, hag a oa, war a greder, an Daned. Ne ouzer ket hag-eñ e oa dicet an anv-gwan (Fiann pe Qubh) da liv o blev, da liv o gouelioù pe d'un dra bennak all.

E-barzh Levz Clanranald, savet meur a gantved zo hag o tanevellañ darvoudoù c'hoarvezet pell amzer a-raok, e c'heller lenn e oa, da vare Somerset, Roue Argyll en 12^{vet} kantved "an holl inizi eus Manav d'an Orkneys, hag an aod a-bazh etre Dumbarton ha Sutherland, e dalc'h Skandinaviz, hag e oa bet rediet an Guezeled chomet bev da glask repu er c'hoadoù hag er menezioù".

AR PROUENNOU

Ar prouennoù hon eus diwar-benn ec'honder ha braster emled Norziz e lodennoù zo eus Bro-Skos zo tri doare anezho : prouennoù hendraouriezhel, dielloù kozh, iwerzhonat koulz ha norzat, hag anvioù-lec'h.

Bez'ez eus, a-hed hon aodoù, evit an hendraour, lies roud eus ar Vikinged. Bezioù norzat a c'heller kavout niverus en Inizi an Hanternoz, met en Hebridez n'eus bet kavet betek-hen nemet un div zousenn bennak anezho. Lod zo "bezioù gant begoù", an den marv o vezañ bet beziet en e lestr. Rifvedoù-houarn zo bet kavet enno, armoù, klavioù, binvioù, kinkladurioù evit paotred koulz ha marc'hed, pezhioù-moneiz hag a-wechoù relegoù ur marc'h. Meur a yalc'had vras a bezhioù-moneiz zo bet kavet, dreist-holl unan a oa anezhi ouzhpenn kant pezh arc'hant, e-kichen ar Storr Rock e Skye. Bez' ez eus ivez an teñzor norzat marzhus kavet e parrez Uig, e Lewis, e 1831 - war-dro seikont pezh-gwezboell kizellet en olifant leon-mor, gant enskantadurioù ruz, anezho marteze stal ur marc'hadour norzat. Trevadennoù norzat n'eus bet kavet diouto, betek-henn nemet en Inizi an Hanternoz hag e Caithness, an div muiast-anavezet anezho o vezañ kêriadenn norzat ken brav Jarlshof, er Shetland, hag ur gêriadennig all e-kichen Freswick e Caithness. En daou anezho ez eo heverk ur seurt "ti-hir", hañval-tre ouzh an "tiez-du" savet en Uheldirioù en amzerioù tostoc'h ouzhpenn. Ma stager anv an Norzzed ouzh ar c'hreñlec'hioù-maen, anvet dun, hag a gaver en Uheldirioù hag en Inizi, ha ma c'hell bezañ gwir int bet arveret gant an Norzzed, hañvalout a ra koulskoude e oa diouto a-raok donedigezh an Norzzed.

An dielloù skrivet zo daou rumm anezho, ha gant disfi bras e tleer studiañ an eil rumm koulz hag egile. Diouzh un tu ez eus an danevalloù iwerzhonek, savet gant tud-a-iliz, hag ar re-se, o vezañ gouzañvet kement diwar doarn Norziz, a oa troet un tammig-mat a-enep d'ar Vikinged, anet eo gouzout. Diouzh an tu all, ez eus Sagaidoù Norziz, danevalloù meur e komz-plaen, o tisplegañ kurioù an amzer gozh, savet pell goude an darvoudoù ha troet a-walc'h da ziskouez an traoù bravoc'h ha brasoc'h eget na oant.

Diouzh ur manac'h iwerzhonat e teu dimp ar peder gwerzenn fromus-mañ, kavet en un dornskrid eus an 10^{vet} kantved :

"Put eo an avel hanozh,
Fuilhañ 'ra blev gwann ar mor bras;
N'em eus ket aon e ve treuzet Mor Iwerzhon
Gant brezelourien didruez Lec'hlan".

Setu aze un den dizifenn hag a oa laouen gant ar goventenn peogwir e c'hallfe mirout ouzh ar Vikinged da zont war-du ennañ.

Dre ur saga hon eus an taolennadur bev-tre eus drasterezh kriz an Hebridez gant ar Roue Magnus.

"En ur c'hoari e save ar flammoù war-du an oabl a-us da Liodus (Lewis); mont a reas Magnus da begañ an tan en Ivist (Uist); koll a reas an difennourien o buhez koulz hag o madoù. Argadif a reas Sgidh (Skye) ha Tyrvist (Tiree) ... Ar v-Mylsk (tud v-Mull) a rede kuit gant ar spont. Don e plasennoù Sandey ez eas d'ober brezel. Mogaed a blave a-us da Il (Islay) : paotred ar roue an hini eo e oa boued d'an tan. Pelloc'h er c'hreisteiz, tud Sanntiris (Kintyre) a stoue dindan dremm ar c'hleze. Ober a eure da v-Manverje (tud Vanav) kouezhañ".

Evit pezh a sell ouzh an anvioù-lec'h, kement a zo ezhomm lavarout bremañ eo ez eo brasoc'h an dregantad anezho an hanternoz, o vont bihanoc'h dre ma tiskenner war-du ar c'hreisteiz. Er Shetland hag en Orkney e sav an anvioù-lec'h norzek da 100 dre gant pe dost; e Lewis ez int 80 dre gant, en Uist an Hanternoz hag e Skye 66 dre gant, en Islay 33 dre gant, e Kintyre 20 dre gant hag en Arran 11 dre gant.

Etre 780 ha 850 eo e touaras hag e tiavezas ar Vikinged er Shetland hag en Orkneys. Mestroniañ a rejont ar vro, hep poan abet sur-mat, rak ast diester e oa ar boblañs eno, war a hañval. Paganed e oa ar Vikinged neuze, ha da get ez eas ar Gristenizh a-pad ur pennad. Se zo diskouezet gant an dizoloadennoù pouezus graet nevez zo en enezenn St. Ninian, er Shetland : ur ouelezennad bezioù pagan a zo etre div ouelezennad bezioù kristen, lod koshoc'h, lod nevesoc'h, gant ur mell teñzor-iliz hag a oa bet, anet eo, kuzhet ouzh ar Vikinged. Dont a reas an Norzzed da vezañ yezh nameti Inizi an Hanternoz ha chom e reas ar rannyezhoù Norn en implij er Shetland betek an 18^{vet} kantved, ha betek ar 17^{vet} kantved en Orkneys, pelloc'h c'hoazh en inizi digenvesoc'h, ha lezet eo bet ganto o merk war brezeg eneziz hiziv an deiz. An Orkneys a voe anezho un earldom pe dugelezh, e-pad meur e renziad, a-wezhioù o ren war an Hebridez, hag a wezhioù all o ren war Caithness ha lodennoù zo eus Sutherland ha zoken war bastelloù all c'hoazh eus kevandir Bro-Skos.

NORZIZ EN HEBRIDEZ

Ne lavar ket deomp an Istor kalz tra diwar-benn trevadennerezh an Hebridez gant Norziz. Eno o deus kavet ur boblañs o perc'hennañ an douar endeo, hag avel renerien en am lakjont warni. Derc'hel a reas ar gouezeleg da vezañ komzet e-kichen an norzeg, hag a-benn an diwez e c'hounezas ar yezh keltiek an trec'h

dre levezon, anat, ar mammoù gouezelek war ar vugale ganet dezho gant an tadoù norzek. Ur ouenn vesket, ar Gall-qhaidheil, lednorzek, ledgeltiek, en em stummas en Hebridez hag en Iwerzhon, kalz eus an dud-se oc'h en em ziazezañ e korn-bro Galloway. Gouezeleg a gomzent, kentoc'h eget norzek, met, hervez an It. Chadwick, ur gouezeleg pidjin ne oa ken anezhañ, a veze graet dioutañ gic-goc gant Iwerzhoniz. E Galloway e voe komzet gouezeleg betek ar 17th kantved.

Eus an Hebridez, an Orkneys hag ar Shetlands, e tivroas kalz Norziz, gant o mevelien gelt, da Island, ha goude-se eus Island d'ar Groenland ha da Amerika an Hantarnoz, a voe dizoloet ganto 500 vloaz a-raok Kristof Columbus.

En eil hanterenn an 9th hag an 10th kantved, e teuas an Norzed, paganed anezho betek-henn d'en em dzeññ mui-pe-vui ouzh ar gatoligiezh, marteze dindan levezon marc'hed ar vro.

Pa glaskomp empennañ petra oa an Norzed en Hebridez, ez eo ret kompren e oa diouto ur bern rouanez vihan, renerien vihan, pep e anezenn dezhañ pe e enezeg. Roue Norge, pe e eiler, Earl Orkney, pe Roue Manav hag an Inizi, a veze gantañ ur meni aotrouniezh war gement-se, met ret eo kompren e oa kalz frankiz gant an holl, hag eus an amzer-se marteze eo e teu an dro-lavar ouez-olek : "Is righ qach duine 'na thoiqh fhéin" (Roue emañ pep den en e di). An hini anavezetañ a-douez Rouanez Vanav hag an Inizi a oa Godfrey Crovan, den-meur an Istor manavat, anavezet gwelloc'h dindan an anv a Roue Orry, a varvas en Islay e 1095 hag a renas e ziskennidi e-pad tost daou c'hant vloaz, betek nebeut amzer goude emgann Larqs e 1263.

Un anv pouezus all en istor an alouberezh norzat en Hebridez zo hini ar Roue Magnus e Zivskez Noazh (daoust ha dougen a ras ur c'hilt ?), hag a zraostas Lewis hag an dilerc'h eus an Hebridez, dre an tan hag ar c'hleze, e 1098, evel m'hon eus lavaret endeo, o klask spontañ ar renerien norzat demzieub en o inizi bihan, kent bezañ lazhet e bro-Ulad, e 1100, d'an oad a dregont vloaz. Brudet eo en hengounioù ha danevellerezh Iwerzhon ha Skos.

Un anv bras all c'hoazh eo hini Somhairle Mór, hag a oa a orin led-norzat ha ledouezel. Dont a raas da vezañ Roue Argyll, trec'hiñ Roue Manav hag an Inizi en un emgann war vor, ha kemer dindan e velli Hebridez ar C'hreisteiz - eleze an inizi er c'hreisteiz da Ardnamurchan. E 1164 e savas gant ar stêr Clyde, 64 bag dindanañ, betek Renfrew, da dagañ Roue Skosiz, met lazhet e voe, pe en emgann, pe dre drubarderezh. Dioutañ e tiskennas ar re a voe tiarned an Inizi er c'hantvedoù da heul, an dudad Domhnall, ha meur a dudad all en Uheldirioù.

Dedennus eo teurel avezh e oa e Ti ar c'h-Keys, sened Manav, en derou-holl, 32 ezel - 16 eus Manav, 8 eus an Inizi-Pellañ (eleze ar re en hantarnoz da Ardnamurchan) hag 8 eus Hebridez ar C'hreisteiz. Goude ma voe kemeret Hebridez ar C'hreisteiz gant Somerled (Somhairle) e tiskennas niver ar c'h-Keys eus 32 da 24. Diwezhatoc'h c'hoazh, pa voe kollet an Inizi-Pellañ, e voe anvet gant Manaviz an 8 dileurid hag a zeue, en a-raok, diouzh an Inizi, e doare ma'z eo chomet 24 ezel e-barzh Ti ar c'h-Keys betek an deiz a hiziv.

PEZH ZO CHOMET WAR-LEERC'H NORZIZ

Petore levezon o deus bet ar Vikinged war Galted Vro-Skos ? Petore heuliedoù, mat pe fall, a zo bet d'o alouberezh gwadaek ha d'o femp kant bloavezhied trevadennerezh en hor bro ?

An heuliad pennañ ha pouezusañ eo a voe dizrannet Skosiz ar c'hevandir diouzh Iwerzhon, diouzh Bro-Skoz, diouzh Europa a-bezh e-pad ur c'hantved hant, hag e voe atizet unvanadur politikel Bro-Skos gant tagadenn ar Vikinged.

Diseas eo empennañ petore levezon zo bet war ar vuhez kevredigezhel, arboellerezhel, politikel, ma c'heller ober gant gerioù zo komand-all eus an amzer-vremañ. Arabat eo dimp rannañ an traoù en un doare re sklaer ha re resis. Dre vras, framm ar gevredigezh keltiek a oa ar Baile (pe kêriadenn), enni un ugent tiegezh bennek, hag a oa rannet e "palevarzhoù" (ceathramh) hag "aizh-vedonnoù" (ochdamh). Hañvalout a ra Norziz bezañ degemeret ar framm-se, goude kemmñ an anvioù evit lakaat aasoc'h ar sevel-tailhoù. Un dall (pe scat) un oifad arc'hant a oa savet diwar pep baile, hag a zeuas diwar-se da vezañ anvet ur pastall-oifad (e gouezeleg tir-una, un anv a zo bet miret en Una-na-Cille da skouer e Skye hag en Unganeba en Uist an Hantarnoz). Ar pastall-oifad a oa rannet en ugent pastall-gwenneg (pep unan o paeañ ur gwanneg-arc'hant evel scat), hag int isrannet e pastalloù hant-gwenneg ha pastalloù diner, anezho anvioù hag a gaver e lec'hioù evel Pennvaown, Pennvaogel, Laffin (lethphighinn) ha Fecirling.

Aketus ez eo bet studiet an difennoù-mor norzek e Manav hag an Orkneys, ha klasket ober an hevelep studi an Hebridez, met rouez eo an testenioù, ha ne c'heller ket kaout ur mennoz sklaer diwar-bann kement-se. Bez e c'heller goulenn ouzh an-unan hag e oa tu da sevel ur raktres kenemzifenn en Hebridez, gant kement a renerien vihan e kement an inizi. Ne c'heller ket cham hep goulenn ouzh an-unan un dra avat : petra a vije daut istor an Hebridez da vezañ mar bijent chomet e-barzh rouantelezh Manav hag an Inizi, ha bet o lod er riez politikel dieub a zo bremañ hini Vanav.

Daoust dezho bezañ, en derou, paganed, e oa gant ar Vikinged reolennoù strizh a vuhez vat. Bez' o doa, evit an amzer-se, ur sevenadur uhelziornet hag ur barnerezh renket-mat ha diouto o-unan. Rannet e oant, evel Gouezelad Bro-Skos, evel Iwerzhoniz, ha sur-mat evel ar Biktet ivez, e tri renkad kevredigezhel - daoust na oa ket an tri renkad-se dizrannet ken sklaer-all marteze - ar renerien gant ar gwirioù war an douar, an dud dieub, hag ar gouerion, a oa sklavet pe served. Gant Norziz e oa un doare perc'hennañ-douer gant an hinienn a zo c'hoazh en arver an Orkneys. Marteze ez eo bet perc'hennet an Hebridez hevez an doare-se e-pad ur pennad-amzer met n'eus testenid diarvar ebet. E-touez ar Galted, er c'hontrol, e oa perc'hennet an douar a-gor, gant ar meuriad. Hervez W.F. Skene, gant ar Galted ivez, e chome ar galloud-ren diwar hêrezh an un tiegezh, met diwar zibab e teus d'an hinienn, gant ma c'helle, a-wezhioù, ar breur bezañ kavet gwelloc'h eget ar mab, da skouer; ha n'o doa ket ar marc'hed ar gwir da ren. E-touez Norziz, an enep, e oa gant ar mab henañ ez as ar galloud, ha ma ne oa mab ebet e c'helle ar verc'h kemer ar reneriezh. Betek pe boent e voe

mesket en doareoù-se en urzhiadur an dudad, diwezhatoc'h, zo ur gudenn re luziet evit he studiañ amañ.

Un dra a reas, diogel, ar Vikinged eo kement-mañ : degas gwad navez er meskad keneloù a oa endeo e Bro-Skos, keneloù rakkeltiek, Piktod, Gouezaled, Brezhoned, Angled hag an dilerc'h. Eneziz hag Uheldiriz a zo, hiziv an deiz, ur bobl mesket-tre, gant kalz gwad norzat, daoust ma n'eus ket, anat eo, kement ha-kement e pep lec'h. Testeniet eo an elfenn norzat en hon hendadalezh gant ur bezn anvioù - pezh na dalvez ket kement ha lavarout ez eo a ouenn norzat kement hini a zo gantañ un anv norzek. E-touez ar reganvioù norzek hon eus - ha teurel evezh int bet saoznekaet alies dre gemer un anv biblek da gevatal dezho : Tormod (Norman), Torcuil (Torquill), Goraich (Godfrey), Ragnall (Ronald), Squire (Zachariah), Iomhair (Iver), Ruarich (Roderick), Somhairle (Somerled). Rouesoc'h eo an anvioù banal (dalc'hit soñj e timeze Norziz peurliesañ gant merc'hed kelt), an hini anavezetañ anezho o vezañ Ragnall pe Ragnaid, eus an norzeg Ragnhildis, saoznekaet e Rachel. Kalz anvioù tiegezh pe anvioù tudad a orin norzek zo : MacAskill, MacAulay, MacLeod, MacRaid, MacSween, MacIver, Lamont, Nicolson, hag all.

Daoust hag hon eus bet da hêrezh, war un dro gant hon anvioù hag hor gwad norzat, un nabeut stummoù havek en hon spered ?

Kavet e vo tud evit lavarout a teu d'ar gouezel eus e wad norzat an dristidigezh a vefe, sañset, ennañ atav. Hag-ef e oa Norziz tud trist ? Hag-ef e vez atav trist ar Gouezel a-vremañ ? Mard eo trist, daoust ha n'eus ket abegoù all ? Lod a gomzfe eus hon tamz-amzer - hag a vez, koulskoude gwelloc'h eget na soñjer peurliesañ. Lod all a rafe meneg eus darvoudoù mantrus 'zo en hon Istor - ar Skarzhadegoù, an Diboblañ, h.a.

Lod a lavar e vez troet ar Gouezel Skos da grediñ betek re en tonkadur - an den, an tonkad merket deoc'h en a-raok ha na c'hellit kemañ o doare ebet, ur plag-spered hag a zo bet kreffvaet c'hoazh, en amzerioù tostoc'h ouzimp, gant plegoù kravezel zo. Hafvalout a ra ar Vikinged bezañ kredet kalz en tonkadur. O doue, O'inn, en doa renket pep tra en a-raok evito, met se ne dalvez ket evito kement ha chom azaset hep ober natra, da c'hortoz an tonkad didec'hus. En enep, war-raok ez aent, o talañ ouzh an dianav hag ouzh riskloù ar mor, hep plegañ.

AR GARANTEZ OUZH AR MOR

Daoust hag eus o hendadoù norzat eo e teu d'hon eneziz o c'harantez ouzh ar mor ? Hep mar, stag-mat ouzh ar mor eo buhez an eneziad. Ewel ma lavaras ar Rev. Dr. Roderick MacLeod : "lakant a ra ar mor en eneziad da vezañ kalonek, met e zerc'hel uvel". Hag ar Rev. Dr. Kenneth MacLeod eus Gigha a skrivas ur wazh : "moarvat ez eo d'o hendadoù norzat eo e tle an Eneziz o c'harantez ouzh ar mor, kentoc'h eget d'ar gwad kelt a zo enno. Ar Gelted kozh a wale ar mor evel ur galloud tefval, kevrinus, križ evel ur vaouez drouk, mat barrek-tre d'o gwaraziñ a-enep d'o enebourien. Norziz, er c'hontrol, a oa ar mor evito "ur wenodenn war-du ar c'hloed"; en tu all d'an tonnoù e oa douaroù souezhus ha pinvidigezhioù divent, eno d'an dud kalonek da zont d'o c'hemer.

Ember, en o doare da gompren ar mor, e oa ar C'helt ar barzh ar gwellañ, hag an Norzad ar morer ar gwellañ. En o diskennidi eo mesket an doue demz-spered : ar garantez norzat ouzh ar mor zo bet donaat ha liesaet gant faltazi ha tan ar Gelted".

Un den hiniennel-tre e oa an Norzad - evel m'en diskouez al lies anv-lac'h zo enno anvioù-tud, evel m'en diskouez ivez ar saegoù. Un den hiniennel eo ivez an Uheldiriad, daoust da hengoun an nabachd (amezegiezh) hag an qualainn ri qualeinn (skoz-ouzh-skoz).

Diskouezet o deus tud an Uheldirioù hag an Inizi o zalvoudegezh evel divroerien ha trevadennourien, e-giz ma reas ar Vikinged en o amzer.

Ha petra, en hon hengounioù, en hor c'hredennoù-pobl, a zo deut dimp a-berzh ar Vikinged ? Setu aze ur gudenn gwall luziet, ha diaes eo dizoleañ hiziv piv eo an amprestour, ha petra en deus amprestet.

Kalet ha didruez e oa ar Vikinged. Ewel an holl bobloù isdiorroet, hag un nebeut pobloù a gev dezho bezañ diorroet, o doa brizhkredannoù. Bez o doa rummad doueoù - personeladurioù eus nerzhioù an natur, eus an nerzhioù-se o devoa da stoum outo dibaoez. An doue pennañ gant Vikinged ar C'hornog a oa, hervez Maratander, I'orr ar C'huruncour, a zeu diouz e anv ar ger Thursday. Morzhelioù I'orr, anezho traezoù-enep-hud, a zo bet kavet a beziou zo. Bez e oa O'inn, doue ar vuhez hag ar marv, a zibaba e donkadur da bep den, hag a oa gantañ div vran hag a lavare dezhañ pep tra. Ac'hana marteze an dro-lavar ouz-elek : "The fios fithich ead" - (gouiziegezh ar vran a zo ganit). Klasket o deus an Dr. George Henderson hag un nabeut re all diskouez an orin norzek zo da lod eus hor c'hredennoù, met na c'hellomp ket studiañ ar gudenn-se bremañ. Souezhus o vefe, e gwirionez, ma ne vefe ket bet, etre Kelt ha Norzad, levezon a-berzh an eil war egile, goude an hanter-milved int bet o kedveañ.

LENNEGEZH HAG HENGOUN

Lezet o deus Norziz ur roud diarver war hol lennegezh hag hon hengounioù-pobl. An hirzanevell e komz-pleen zo tra ar Gelted evel ma'z eo tra Norziz ivez, an danevell hag a veze displeget en nozvezhioù goañv dirak un tantad skodus. E lennegezh ar Gouezel amañ an Norzad bezant e pep lec'h. Brezeliet an deus an Iwerzhon, hervez an danevelloù kozh, kantvedoù kent na zouaras e vagoù da vat war aodoù Iwerzhon. Rummad fiann, an danevelloù, zo warnañ ul levezon norzat kreñv-tre, a zo bet studiet mat gant an Dr. Reider Christiansen en e levz bras diwar-benn "ar Vikinged hag o brezelioù en Hengounioù Iwerzhon ha Skos" (1931). O lann "West Highland Tales" ha "Leabhar na Féinne" gant J.F. Campbell a kaver prouennoù e-leizh eus al levezon kreñv ha padus o deus bet ar Vikinged war a-berzh-pobl ar Gelted.

En hol lennegezh hag hengoun gouezalek e kaver tri doare disheñvel da sell-out ouzh Norziz :

1. Da gantañ, an Norzad gwelst evel an enebour, an estren kasad. Bez ez eus meur a zanevell-pobl, peurliesañ stag-mat ouzh ul lac'h resis, hag a ziskouez ar Viking evel an enebour. Beziat e vez ar brientinezed norzat e lein

fuich ! (ger-estlamm pa vez c'hwez-fall), wannsachadh (klaskerezh, furcherezh), crùb (soucheañ), bideadh (o tantañ), tapadh leibh (Trugarez), cha tug e taing air (n'en deus graet tra ebet dezhañ).

An Ao. Kenneth MacKenzie, eus Barra, Lewis, a notenne, ouzhpenn hanter-veac'h zo, ar gerioù-mañ avel gerioù dezho un orin norzek. Ar ger buanna da skouer, a zo evitañ ul lezireg a vev diwar-goust e amezien, hag a dalvez, e geriadur ar Rev. Dr.M. MacLennan, komant ha soudard kasat da vevañ en un ti prevez, lezireg; hervez MacKenzie e taufe eus an norzeg buandi, da lavarout eo merour, met a-enep d'an dra-se emañ Oftedal. Manañ a ra ivez MacKenzie ar ger-niveriñ norzek nemetañ a vefa kavet e Lewis - trithir da lavarout eo tri den kemeret a-stroll, evel ar gouezeleg a-vremañ trüür, o tont an norzeg thrir. Lavarout a ra ez eo aet er-maez a c'hiz, met e kaver ar ger miret en ur poz-gwerzennoù lakaet war anv Donald Morrison, mab Breve, ken brudet :

Dh' iomarsinn fear mar fhear ri dithis
'S nam b' fheadar e, mar fhear ri thritir.

(Kas a rafen ar vag a-nerzh roaivoù a-enep da zaou
Ha diouzh ret a-enep da dri).

Ur benn gerioù-kunujenniñ a zou eus an Norzeg, dreist-holl e gouezeleg Sutherland.

Da skouer : a thriotar (lampon ac'hano'h), slebhcar (ur boule), dais (ur genaoueg, e barzhonegoù Rob Donn), colbhar (ul lonteg, adarre e barzhonegoù Rob Donn), glutar (un den rankles), amhleir (ur pann-sot). En c'horn-bro genidik em eus klevet tud oc'h ober trouz dre lavarout a thràill (A sklav ! sklav ac'hanoù). Daoust ha n'eus ket aze evel un eñvor eus an doaroù a oa gant ar Vikinged e-kavet ar Gouezeleg izelloc'h o renk ? Oriopail (dalc'het gant al labour) ha leadhraich (tousmac'h, eus an norzeg gledin), setu gerioù a laka da soñjal e paotred start ouz al labour ha trouzus war un dro !

Ouzhpenn al levezon war ar gerioù, ez eus, hervez Oftedal, un dra all : "Un dra anet eo e kaver e meur a rannyezh gouezeleg skos, roudoù ul levezon norzet kreñv war ar soniadur." Dreist-holl, emezañ, "e distagadur Lewis e kaver ul linenn-vouezh heñvel-ere ouz hini norzeg ar gevred." Doare Lewis da zistagañ a ha th moan a c'hell bezañ un aspadenn norzek. Hag ivez, gouez d'un nebeut gouizieien, doare gouezeleg an Hanternoz da zistagañ str e-lec'h sr e derou ur ger : da skouer e struth (stêr-dour), sròn (fri), srath (traon-ienn), srang (kordenn), srath (un aridennad), srion (ur weskonn) distaget struth, stron, strath, strang, streath ha srion. Lavarout a ra ar c'helenner Kenneth Jackson ez eus, a-touez dibarderioù gouezeleg Bro-Skos, o tishañvelaat anezhañ diouzh gouezeleg Iwerzhon, unan hag a c'hell bezañ dleet da levezon an norzeg - rak'hwezhadur ar ð, ar g hag an t, da lavarout eo, al lakaet ur c'hwezhadur a-raok al lizherennoù-se e gerioù evel ceap (ceahp), cat (caht), mac (mahc). Diskouezet en deus ivez an Dr. Jackson penaos en deus an henouez-aleg, ar yezh a zeuas diouti iwerzhoneg, gouezeleg Skos ha manaveg, en em zisrannet da gentañ e gouezeleg ar Retar, (manaveg ha gouezeleg skos) ha

gouezeleg ar C'hornog, manaveg ha gouezeleg skos o chom heñveloc'h en eil ouz egile eget hini anezho o-daou ouz an iwerzhoneg. Deut eo gouezeleg ar Retar da vezañ eunoc'h eget gouezeleg ar C'hornog, ha lavarout a ra an Dr. Jackson en em santfed douget a-walc'h da welout en dra-se un disoc'h d'al levezon norzek; met lavarout a ra ivez ez eo c'hoarvezet an eunadur-se goude mare an norzeg hag en kaver e rannyezhoù gouezeleg a zo chomet atav er-maez eus an dachenn norzekaet.

ANVIÖU-LEC'H NORZEK

Ar brouenn wellañ hon eus o tiskouez aloubidigezh lodennoù zo eus Bro-Skos gant an Norzeg zo da vezañ kavet en anvioù-lec'hioù. Meneget hon eus endao penaos ez a dregantenn an anvioù-lec'h norzek eus 100% en Inizi an Hanternoz betek 11% en Arran.

Heñvalout a ra o deus an Norzeg degemeret hep o c'hemañ anvioù an inizi brasañ, ouz o zreuzskrivañ hepken e norzeg. Shetland - pell amez ul lodenn eus Bro-Norge - he deus kollet hec'h anv keltiek kozh Innis-Cha, a zo bet ad-anvet Hjaltaland (e gouezeleg Sealtainn). Miret ha deus Orkney hec'h anv rak-norzek, hag an div enezeg a-gevret zo bet graet anezho e norzeg Nordreyar - Inizi an Hanternoz.

An Hebridez (a zlefe bezañ Hebudez) a veze anvet e norzeg Sudreyar (Inizi ar C'hreisteiz), ac'hano anv Eskob Sodor ha Manav. Kantvedoù diwezhatoc'h ez eo bet disoñjet gant an dud pe tra 'oa talvoudgezh Sodor, ha setu ar pezh a gavomp en un d'Daolenn eus Iona", embannet e 1693 : "ur gêr vras a oa an enezenn Iona anvet gwezhall Sodor, a c'heller gwelout c'hoazh, nepell diouzh ar porzh, an dismentroù hag ar straedoù anezhi. Bez' e oa ar gêr-se e-kreiz an enezenn war an aod reterel".

Skye, Mull hag Islay o deus hiziv c'hoazh an anv o doa kantvedoù a-raok an Norzeg.

An inizi bihanañ, peurliesañ, a zo bet adanvet gant Norziz. An dibann-ger ä, äy, äy a zo an norzeg evit lavarout enezenn hag en e raog a vez peurliesañ anv un den, anv un evn, anv ul loen, pe ur ger o taolennañ doare an enezenn. Meur a enezenn zo bet anvet Orfirisav - da lavarout eo enezenn-da-vare-an-uhelvor. E gouezeleg eo deut an anv da vezañ Oro'osaich, e saozneg Oronsav pe Orosav. Bez ez eus nav pe dek Oronsav a-hed aodoù Bro-Skos.

Un enezenn vihan, sko ouz unan vras, a veze kavet heñvel ouz ul leus bihan e-kichenik e vamm, ha setu perak ez eus ur "calbh" (= leus) e Bae Tebr-mory, Mull, hag unan all e-kichen Manv.

Un niver inizi a voe anvet gant an Norzeg Pabbay, aleze enezenn ar manac'h. Ar venec'h-se, eus an Iliz Keltiek, a blije dezho bevañ ur vuhez digenvez, peurliesañ war inizi bihan, ha bez e c'hellomp bezañ sur e oa ur manac'h o vevañ war gement enezenn zo bet roet dezhi an anv-se gant an Norziz. Heñvel a-walc'h eo an anv Papyl, roet d'un enezenn a oa warni ur manati. En Orkney ha Shetlands ez eus pemp Pabbay ha pevar Papyl, hag an Hebridez c'hwec'h Pabbay ha daou b-Papyl.

Kalz inizi zo dezho anvioù tud - marteze anv an Norziz kentañ zo bet perc'henn

warno. Da skouer Eriskay (enezenn Erik), Berneray (enezenn Björn - meur a hini zo), Groa (enezenn C'hroa - ur vaouez e oa Groa). Un nebeut inizi, o deus anv ul loen, da skouer Jura, hag a oa Diùraich (enezenn an demm). Lod o deus anv un evn, evel Scarba (enezenn ar moirvan). Anvioù dedennus all zo Lingey (enezenn ar brug) ha Flotta (enezenn gompes).

Ur studi plijus-tre e c'hell bezañ kement-se, mat arabat eo tremen re a amzer gant an anvioù-lec'h norzek. An anv uilean (enezenn) a zeu eus an Norzeg hag en deus kemeret lec'h an anv keltiek, hag a oa koshoc'h, innis, hag a vez arveret, en deiz a hiziv, evit ur bradenn kentoc'h eget evit un enezenn.

Un nebeut gwirziennoù norzek, hag a vez kavet alies en anvioù-lec'hioù, eo ar re-mañ : vick (ur bae, un aber), vann (un oufig), nes (ur beg-douar), gia (ur frailh en tevenn), aidh (ur stagell-douar etre div enezenn), klettr (ur garregenn pe un tornaod), fiordy (un aber), a (ur stêr), bolstadr (ur vereuri), setr (un ti), saetr (ur peurvan), stadr (un drevadenn, un annez), borg (ur c'hreñvlec'h), byr pe by (ur vereuri), hamarr (ur garregenn pe un tevenn karregennoù), kvi (ul lec'h klos evit ar saout), gardhr (ur park klozet), skali (ul lochenn).

E Lewis e kaver ar ger gro, o tont eus an norzeg grof (un toull pe un islonk) e 63 anv-stêr, evel Disaro (e Borve), Botarro (e Shader).

Ul lec'h da c'horre ar saout, e gouezeleg buaille, a veze e Norzeg Stodhull. E Barra da skouer hon eus Tangasdale, gouezelekadur Tangastodhull, al lec'h-goro e-kichen ur beg-douar.

Trawalc'h hon eus lavaret, avat, da ziskouez ez eo bet hir ha liesdoare levezon ar Vikinged war Geltaed Bro-Skos. Kenlabouret o deus da ober ac'hanomp ar pezh ez omp, mat pe fall, evel tud, hag evel kenal.

SCOTTISH WOMEN:

Mary Macleod, Màiri Nighean Alasdair Ruaidh

by James Thompson

The number of notable Celtic women in Scotland, past and present, is legion, but you would not have me mention them all. The short time only (12 mins.) at my disposal today limits the number I can speak about, even in a summary manner, to three. It is no reflection on the notable women of mainland extraction that I select three from the Isles, one from Harris, one from Skye, and one from Lewis.

The Harris representative is, of course, Mary Macleod, better known by her Gaelic name, Màiri Nighean Alasdair Ruaidh. Though born in Harris she spent most of her active life with the family of the Macleod Chiefs in Dunvegan Castle in Skye, the main scene of all her poetry, and where she found much inspiration and happiness. The dates of her birth and death are still somewhat uncertain. One surmise gives her period as 1588 to 1693 which gives her a long life of 105 years. The accepted period now would seem to be 1615 to 1707. She is definitely known to be alive in 1705. She is buried at St. Clement's Church Rodal, but no monument marks her grave because the exact site has never been identified.

I select Mary Macleod because of the prominent part she played in breaking away from the classic Gaelic poetry with its numerous rules and shackles, and establishing the modern form with its freedom and range. We cannot appreciate her distinctive achievement without dwelling for a little on the old and the new poetic types.

The oldest form of classic poetry, common up to the 17th century, to both Ireland and Scotland, was originally based on the early Latin hymns and was characterised by syllabic structure with rhyme at the end of each line or couplet. A very large system of intricate metres, some three hundred of which are still known to us was developed. Only persons who had undergone a long period of special training in language, phonetics, and metres, and who were knowledgeable in literature, tradition, and history

James Thompson

could aspire to master the general pattern. These trained and educated people commanded honourable positions in society, and were well rewarded for their compositions. The office of bard was normally hereditary. You were a bard because your grandfather or your father was one.

